

7153
ZANTIK

EVIT

PELERINACH ITRON VARI AR SALET

E KICHEN MONTROULEZ

AR 7 A VENGOLO 1873

Var don : *Kantik Breuriez ar Feiz.*
Hag ive var don : *Santez Mari.*

Diskan :

Kassit, Mam garantezuz,
Kassit hor pedennou,
Bete kalon sacr JESUS,
Hag ive hon daelou.
Nouc'h ket galvet hep reson :
« REFUCH AR BEC'HERIEN ! »
Dreizoc'h hor bezo pardon,
Dreizoc'h ni er goulou.

• 1 •

En ho foan ar vugale
Da glask ho mam a red,
Ha kerkent em'int pare
M'a o deus hi kavet.
D'ho mam hep aoun nag enkrez
E kountont ho foaniou ;
Sur hint eus he madelez,
Sec'ha 'rai ho daelou

• 2 •

M'ar hon eus poan ha glac'har,
Sonjomp en deus JESUS
Roet deomp var ar c'halvar
Eur Vam drugarezuz.
Ar Vam-ze eo ar Verc'hez,
Ar guella Mam a oue.
Eur Vam leun a vadelez
Evel he Map-Doue.



Guelit ar brezel iskiz
 A ra Satan hirio,
 D'hor Mam santel an Iliz,
 E Rom hag e pep bro.
 Ar Pap, kollet he stadou,
 Zo dalc'het prisonnier,
 O c'hedal he chadennou
 Evel guechall Sant Per.

An dud difeiz, digreden,
 Ho devez lavaret :
 « Da JESUS ha d'he lezen,
 » Brezel, brezel bepret.
 » Pe seurt ezom, — emez-ho, —
 » Hon eus-ni a Zoue?
 » Hep Doue ni a vevo
 » Hag hep ar Pap ive. »

D'an dud-ze, GUERC'HEZ-VARI,
 Obtenit sklerijen
 D'anaout ho ingratiri,
 Ha d'ober pinijen.
 Dre ho kalloud burzuduz
 Er bed oc'heus mouget
 Kalz kredennou binimus,
 Kredennou miliget !

O MARI ! bezit skoazel
 An Iliz catholik,
 Ha roit d'hon Tad santel
 Hirio ken reuzeudik
 An nerz-kalon, ar frankiz
 Dez-ha ken necesser,
 Evit gouarn an Iliz,
 Evel meo he zever.

• 11 •

Selaouit c'hoas eur beden,
O Guerc'hez biniguet !
Plijet ganeoc'h rei souten
D'ar Frans hor bro-garet.
Grit ma vo peoc'h, karantez
Etre ar Francisien,
Hag adarre dienkrez
Ar Frans a vo christen !

• 12 •

Dreist oll, ô Guerc'hez santel,
Ni ho ped a galon,
Da viret en Breiz-Izel
Ar guir relijion.
Gant gras Doue ni zalc'ho
D'an Iliz, d'hor c'hreden,
D'hon Tad santel ni vezo
Fidel da virviken !

~~~~~  
Kalon sacr a JESUS, ho pet truez ouzomp !  
Kalon pur a VARI, pedit evidomp !

~~~~~  
VU et APPROUVÉ :

Quimper, le 27 Juillet 1873.

J. JÉGOU,

Vicaire.

Propriété de l'Éditeur,

J. H.